bouton	1) /vêtement/ boutonenn f. boutonou ; bouton m. -iou perdre un bouton : koll eur voutonenn. coudre un bouton à un manteau : gwriad eur voutonenn war eur vantell. arracher un bouton : divramma eur voutonenn. un bouton en bois : eur voutonenn goad. un bouton en cuivre : eur voutonenn goevr. 2) /mécanique/ bouton m. -iou appuyez sur le bouton : pouezit war ar bouton. tourne le bouton de la radio : tro bouton ar post bihan. 3) bos m. -ou il a des boutons sur la figure : hennez e-neus bosou war e vizañ. cette maladie donne des boutons : diwar ar hlefvéd-se e sav bosou
bouton d'or	pao-bran m.
boutonner	prenna (prenn-) boutonne ton manteau : prenn da vantell. boutonne bien tes vêtements : prenn mad da zillad.
boutonnière	toull bouton m. toullou bouton
bouture	bouturenn f. -ou la bouture a pris : krog eo ar vouturenn.
bouvreuil	beuf m. -ed
bovin	les bovins : ar chatal ; al loened-korn.
boxe	boks m.
boxer	boksi (boks-)
boxeur	bokser m. -ien
boyau	bouzellenn f. bouzellou ; bouellenn f. bouellou.
brabant	brabant m. brabafchou cf. charrue

bracelet	braslê m. -iou
braconner	brakoni (brakon-) on l'a surpris à braconner dans le bois : tapet eo bed o vrakoni barz ar hoad.
braconnier	brakonier m. -ien
braguette	1) fourk m. -ou sa braguette est déboutonnée : dibrenn eo e 'fourk. 2) boutonne ta braguette : prenn da vragou.
brailleur	blejal (blej-) les marins braillent à tue-tête : 'ma ar vartoloded o vlej-al a bouez o 'fennou.
braire	hinnoal (hinno-) l'âne brait : 'ma an azenn o hinnoal.
braise	glaouenn-ru f. glaou-ru cuire de la viande sur la braise : rosta kig war ar glaou-ru. il reste encore de la braise : ru eo ar glaou hoaz.
brancard	1) kravaz m. krivizier on a couché le blessé sur un brancard : astenned eo bed an hini gloazed war eur hravaz. 2) kravaziad ils ont ramené du goémon sur un brancard : digased o-deus eur hravaziad bezin. 3) breh f. brehiou le cheval est dans les brancards : ema ar marh 'tre brehiou ar harr.
branche	1) brank m. -ou ; barr m. -ou les branches de l'arbre : brankou ar wezenn. couper les branches : troha ar brankou. scier une branche : heskennad eur brank. secouer une branche : hija eur brank. les branches ploient sous le poids des fruits : stoued eo ar brankou gand ar frouez zo warno. casser une branche : torri eur brank. une branche morte : eur brank maro. une branche sèche : eur brank seh. 2) skourr m. -ou /grosse branche/
brancher	/électricité/ brañcha (brañch-) l'appareil n'est pas branché : n'eo ked brañched ar mekanik.

branchie brenk m. -ou

branler cf. secouer, agiter, etc...

bras

1) /animés/ breh f. divreh  
 le bras droit (gauche) : ar vreh zeou (gleiz)  
 vos bras sont longs (courts) : hir (berr) eo ho tivreh.  
 elle a les bras nus : noaz eo he divreh.  
 se casser le bras : torri e vreh.  
 saisir quelqu'un par le bras : kregi e breh unan-bennag.  
 donnez-moi le bras : roit ho preh din.  
 appuyez-vous sur mon bras : lakit ho torn war ma breh.  
 tendre les bras à quelqu'un : astenn e zivreh da unan-bennag.  
 lever les bras : sevel e zivreh.  
 plier le bras : plega e vreh.  
 croiser les bras : kroazia e zivreh.  
 baisser les bras : diskenn e zivreh.  
 elle avait un panier à son bras : eur baner a oa ganti war goubl e vreh.  
 porter un enfant dans les bras : dougen eur bugel en e zivreh.  
 elle s'est jetée dans mes bras en pleurant : nem dôled eo 'tre ma divreh en eur ouela.  
 écarter les bras : digori e zivreh.  
 il est blessé au bras : gloazed eo bed en e vreh.  
 elle donne le bras à son mari : 'ma breh ouz breh gand he gwaz.  
 j'ai mal au bras : poan am-eus barz ma breh.  
 ils le frappaient à tour de bras : oant o skei warnañ a dro vreh.  
 il l'a soulevé à la force des bras : saved e-neus anezañ war bouez e zivreh.  
 il marche les bras ballants : bale a ra gand e zivreh a-ispill.  
 il a des poils sur les bras : bleo zo war e zivreh.

2) /une paire de bras/ divreh -iou  
 tu n'as pas les bras assez longs : da zivreh n'int ked hir a-walh.  
 tous les hommes de la famille ont les bras courts : pôtred ar famill-ze o-deus toud divrehiou berr.

3) /objets/ breh f. -iou  
 les bras du fauteuil : brehiou ar gador.  
 les bras de la brouette : brehiou ar garrigell.  
 un bras de mer : eur vreh vor.

4) /divers/  
 serrer dans ses bras : briata (briata-)  
 ses petits-enfants lui sont restés sur les bras : chomed eo e vugale-vihan war e chouk.  
 il est en bras de chemise : e korv e roched 'ma.  
 je l'ai saisi à bras-le-corps : kroged em-eus ennañ a dro vriad.  
 il a un livre sous le bras : eul leor a zo gantañ dindan e gazel.

ils se promènent bras-dessus bras-dessous : 'maint o vale kazel-ha-kazel.

brasse goured m. -ou  
 ce rocher est à vingt brasses du phare : ugent goured zo 'tre ar garreg-se hag an tourtan.

brassée briad f. -ou  
 une brassée de foin : eur vriad foen.  
 une brassée de fleurs : eur vriad bokedou.

brave 1) kaloneg ; kourajuz  
 c'est un brave : eun den kaloneg eo.  
 2) mad  
 un brave homme : eun den mad.  
 ce sont de braves gens : tud vad int.  
 un brave type : eur pôtr mad.

bravement gand kalon ; gand kouraj  
 ces soldats se sont bravement battus : en em ganned eo ar zoudarded-se gand kouraj.

bravo bravo !

brebis dañvadeg f. -ed  
 une brebis d'un an : eun dañvadeg vloaz.

brèche /dans une haie, un talus/ ode f. -ou ; ribin f. -ou  
 les vaches se sont échappées par la brèche : tehed eo ar zaout kuit dre ar ribin.

bredouille gag  
 le chasseur est rentré bredouille : gag oa ar chaseer en eur zond en dro d'ar gêr.

bredouiller balbouza (balbouz-)

bref 1) cf. court  
 2) son frère, sa sœur, bref, tout le monde était là : e vreur, e hoar, erfin, tout an dud oa eno.

brestois /adj./ la région brestoise : bro Vrest.

Brestois les vieux Brestois : Brestiz koz.  
 c'est un Brestois : hennez zo deuz Brest.

bretelle breutellen f. breutellou  
 il a mis ses bretelles neuves : 'ma e vreurteu nevez gantañ.

breton 1) /personne/ breton m. -ed ; breizad m. breiziz (livr.)  
les Bas-Bretons : tud Breiz-lzel ; Breiz-lzeliz.  
2) /langue/ brezoneg m.  
il ne sait pas le breton : ne oar ked brezoneg.  
il sait parler le breton : hennez oar kōzeal brezoneg.  
ici on parle souvent breton : amañ vez kōzeed brezoneg  
añtez.  
les jeunes ne savent plus le breton : ar re-yaouank ne  
ouzont ked ken ar brezoneg.  
j'apprends le breton : 'maon o teski brezoneg.  
il a oublié le breton : ankoueed e-neus e vrezoneg.

breton /adj./  
1) breton m. -ed ; bretonnez f. -ed /personne/  
ils sont bretons : bretoned int.  
elle est bretonne : bretonnez eo.  
2) /de langue bretonne/ brezoneg  
un livre breton : eul leor brezoneg.  
des mots bretons : gerioù brezoneg.  
des expressions bretonnes : troioù-lavar brezoneg.  
une chanson bretonne /en breton/ : eur ganaouenn  
vrezoneg.  
3) /civilisation traditionnelle/  
les costumes bretons : dillajou koz ar vro ; dillajou koz  
Breiz.  
les danses bretonnes : dañsou koz ar vro ; an dañsou koz  
e Breiz.  
les vieilles maisons bretonnes ont de petites fenêtres :  
an tfez koz a zo e Breiz a vez prenechou bihan warno.  
4) /dans tous les autres cas/  
(entre Bretons on utilisera fréquemment les expressions  
à nuance affective contenant bro)  
la population bretonne : tud ar vro-mañ ; an dud zo e  
Breiz.  
les crêpes bretonnes : krampouez ar vro ; krampouez  
Breiz.  
du beurre breton : amann deuz ar vro ; amann Breiz.  
les paysans bretons : ar beizanted e Breiz.  
les côtes bretonnes : δchou Breiz.  
la campagne bretonne : mêziou Breiz.

bretonne Bretonnez f. -ed

bretonner brezonega (brezoneg-)

brevet breved m. breujeou  
il s'est présenté au brevet : δd eo da glask e vreveud.  
il a été reçu au brevet : bed e-neus e vreveud.  
il a été collé au brevet : refuzed eo bed d'e vreveud.

bréviaire breviel m.  
le vieux prêtre lit son bréviaire en marchant : 'ma ar  
beleg koz o lenn e vreviel en eur vale.

bride brid m. brijou  
il tient la bride de son cheval : 'ma krog e brid e varh.

bridé il a les yeux bridés : moan eo e zaoulagad.

brider brida (brid-)  
brider un cheval : brida eur marh.

brèvement berr-ha-berr ; e berr gomzou

brigadier brigadier m. -ien  
le brigadier des douanes : brigadier ar valtouterien.

brigand laer m. laeron cf. voleur.

brillant 1) lugernuz  
une étoile brillante : eur steredenn lugernuz.  
2) lufr  
des chaussures brillantes : boutou lufr.  
des casseroles brillantes : kastolorennou lufr.  
des yeux brillants : daoulagad lufr.  
3) lintr  
les vitres sont brillantes : lintr eo gwer ar prenechou.  
4) /divers/  
c'est un brillant élève : hennez zo deuz ar re wella barz  
ar skol.  
ses cheveux sont brillants : luha a ra e vleo.

briller 1) luha (luh-)  
ses yeux brillaient de plaisir : luha a ree e zaoulagad  
gant ar blijadur e-noa.  
2) lugerni (lugern-)  
les étoiles brillent dans le ciel : lugerni a ra ar stered  
barz an oabl.  
3) lintra (lintr-)  
les perles de son collier brillent : lintra a ra perlez he  
holier.  
4) para (par-) war  
le soleil brille sur la mer : para a ra an heol war ar mor.  
mais ; le soleil brille : sklēr eo an heol.

brin un brin d'herbe : eur yeotenn ; eur heotenn.  
un brin de paille : eur blouzenn.

quelques brins de paille : plouzennou.  
un beau brin de fille : eur gaer a blah.  
faire un brin de causette : ober eun tamm-k&sz.

brindille	blefchenn f. blefchou
brioche	briochenn f. -ou
brique	brikenn f. brik, brikennou une maison de briques : eun ti brik.
briquet	1) /à amadou/ direnn f. -ou 2) /moderne/ briked m. brikejou.
brise	cf. vent
brisé	1) cf. cassé 2) /fig./ je suis brisé de fatigue : breved on.
briser	torri (torr-) ; cf. casser.
broche	1) /bijou/ brochenn f. -ou sa grand-mère lui a donné une broche en argent : bed he-deus eur vrochenn arhant gand he mamm-goz. 2) ber m. mettre un mouton à la broche : lakad eun dafvad ouz ar ber. tourner la broche : trei ar ber.
brochet	beked m. -ou
brocoli	brikollenn f. brikoli
broder	broda (brod-) elle brode avec une aiguille : broda a ra gand eun nadoz. elle a brodé son nom sur sa blouse : broded he-deus heh ano war he sar. des draps brodés : lifseliou broded. un mouchoir brodé : eur mouchoer broded.
brodeuse	broderez f. -ed
bronze	arem m. une cloche de bronze : eur hloh arem.
bronzé	rouz il est bronzé : rouz eo e grohenn.

bronzer	rouza (rouz-) les touristes vont se bronzer à la plage : mond a ra an douristed da rouza war an ôd.
brosse	1) broust m. -ou ; bros m. -ou une brosse à vêtements : eur broust dillad. une brosse à dents : eur broust dent. 2) /pour peindre/ gwispon m. -iou
brosser	brousta (broust-) ; brosa (bros-) brosser des vêtements : brousta dillad. brosser ses chaussures : brousta e votou ler.
brosser (se)	cf. brosser se brosser les cheveux : brousta e vleo. se brosser les dents : brousta e zent.
brouette	karrigell f. -ou la roue de la brouette : rod ar garrigell. les brancards de la brouette : brehiou ar garrigell. charger la brouette : karga ar garrigell. décharger la brouette : diskarga ar garrigell. le fond de la brouette : f&szs ar garrigell. transporter dans une brouette : karigellad.
brouettée	karrigellad m. -ou une brouettée de terre : eur garrigellad douar.
brouillard	brumenn f. un brouillard froid : eur vrumenn yen. un brouillard épais : eur vrumenn stank. il y a du brouillard : brumenn zo. le brouillard s'est levé : saved eo ar vrumenn. le brouillard est tombé : kouezed eo ar vrumenn.
brouiller	cf. embrouiller, mélanger, troubler, f&szcher.
broussaille	1) strouez f. ; strud f. couper des broussailles : troha strouez. mettre le feu aux broussailles : lakad an tan barz ar strouez. s'écorcher les jambes dans les broussailles : kigna e ziouhar kreiz ar strouez. 2) un terrain plein de broussailles : eur brouskoad.
brouter	peuri (peur-) la vache broute l'herbe dans la prairie : 'ma ar vuoh o peuri yeot ar prad.

**broyer** 1) mala (mal-)  
broyer des betteraves : mala betrabez.  
2) pilad (pil-)  
broyer de l'ajonc : pilad lann.  
3) frika (frik-)  
broyer des pierres : frika mein.

**bru** merh-kaer f. merhed-kaer

**bruine** aillenn f. ; glao yen m. ; glizenn f.

**bruiner** il bruine : glao yen a ra ; glizenni a ra.

**bruit** 1) trouz m. -ou  
un grand bruit : eun trouz braz.  
un bruit terrible : eun trouz spontuz.  
beaucoup de bruit : kalz a drouz.  
peu de bruit : nebeud a drouz.  
un peu de bruit : eun tamm trouz.  
un bruit d'enfer : trouz an diaoul.  
trop de bruit : re a drouz.  
le bruit du train : trouz an trefi.  
le bruit des voitures : trouz an otoiou.  
le bruit des machines : trouz ar mekanikou.  
le bruit de l'eau : trouz an dour.  
le bruit de la mer : trouz ar mor.  
le bruit de ses pas : trouz e dreid.  
je ne peux pas dormir à cause du bruit : n'hellan ked  
kousked gand an trouz zo.  
faire du bruit : ober trouz.  
faire beaucoup de bruit : ober kalz a drouz.  
sans faire de bruit : heb ober trouz.  
entendre du bruit : kleved trouz.  
je n'aime pas le bruit : ne blij ked an trouz din.  
2) son f. -iou  
un bruit de voix : son eur vouez.  
le bruit des cloches : son ar hleier.  
3) brud f. brujou  
c'est un faux bruit : ar vrud se n'eo ked gwir.  
faire courir des bruits : lakad brujou da redeg.  
ce ne sont que des bruits : n'int nemed brujou.  
4) /divers/  
on entendait des bruits de voix : kleved e veze tud o  
kôzeal.  
j'entends un bruit de dispute : kleved a ran tud o chikanad.  
marcher sans bruit : bale didrouz.  
pas de bruit : peoh !  
un bruit de dispute : eur cholori ; eur jabadao.

**brûlant** tomm-bero  
le café est brûlant : tomm bero eo ar hafe-ze.

**brûler** 1) devi (dev-)  
brûler du bois : devi koad.  
brûler du papier : devi paper.  
brûler des mauvaises herbes : devi louzou.  
brûler des vieilleries : devi koz traou.  
brûler du charbon : devi glaou.  
la maison brûle : 'ma an ti o tevi.  
le feu brûle dans la cheminée : 'ma an tan o tevi war an  
caled.  
ça sent le brûlé : c'hwez an deved zo amañ.  
le bois sec brûle bien : devi mad a ra ar hoad seh.  
le bois vert brûle mal : ar hoad glaz ne zev ked mad.  
2) loski (losk-) ; devi (dev-)  
la viande a brûlé : losked eo ar hig.  
les pommes de terre ont brûlé : losked eo an avalou douar.  
il a été brûlé vif : losked (deved) eo bed en beo.  
3) suilla (suill-)  
elle a brûlé ma chemise en la repassant : suilled he-deus  
ma roched en eur ferri anezi.

**brûler (se)** 1) devi (dev-)  
je me suis brûlé la main : deved am-eus ma dorn.  
il s'est brûlé le doigt : deved e-neus e viz.  
il s'est brûlé : nem zeed eo.  
attention, tu vas te brûler : diwall da nem zevi.  
2) skôta (skôt-) ; poaza (poaz-)  
il s'est brûlé le bras avec de l'eau bouillante : skôted  
(poazed) e-neus e vreh.  
je me suis brûlé le pied avec de l'eau bouillante : poazed  
(skôted) am-eus ma zreid.

**brûlure** 1) devadenn f. -ou  
il faut soigner cette brûlure : red eo soagnal an devadenn-  
ze.  
mais : il a de graves brûlures : gwall-zeved eo ; gwall-  
skôted eo.  
il y a une brûlure de cigarette sur la nappe : deved eo  
bed an doubier gand eur zigaretenn.  
2) /divers/  
il a des brûlures d'estomac : kalon-deved e-neus.

**brume** cf. brouillard.

**brumeux** brumenneg  
le temps est brumeux : brumenneg eo an amzer.

brun 1) /pour les cheveux : on ne distingue pas le brun du noir/  
du  
2) /autres cas/ rouz  
il a le teint brun : rouz eo e vizaj.

brun duard m. -ed ; dukard m. -ed  
il est brun : eun duard eo.

brune duardez f. -ed ; dukardez f. -ed

brunir cf. bronzer.

brusque 1) rust  
il a un caractère brusque : hennez zo rust.  
2) feulz  
il est tellement brusque qu'il casse tout ce qu'il touche :  
ken feulz eo ma torr kement tra a vez tre e zaouarn.  
3) souden  
un coup de vent brusque : eur barr-avel souden.  
4) krenn  
un tournant brusque : eur pleg krenn ; eun dro-gorn grenn.

brusquement 1) a-greiz-toud  
il est parti brusquement : êd eo kuit a-greiz-toud.  
2) a-dôl-grenn ; krenn  
la porte s'est refermée brusquement : êd eo an nor en e  
'flas a-dôl-grenn.  
il s'est arrêté brusquement : chomed eo krenn a-zav.

brutal cf. brusque, méchant, violent.

brutaliser cf. battre, frapper.

brute c'est une brute : hennez zo eun den gouez.  
sale brute! : loen fall!  
tas de brutes! : bagad moh!

bruyamment il s'est mouché bruyamment : grêd e-neus trouz en eur  
hweza e 'fri.

bruyant 1) trouzuz cf. bruit  
cette rue est bruyante : trouzuz eo ar ru-ze.  
2) /divers/  
ces enfants sont bruyants : ar vugale-ze a ra trouz.  
cette usine est très bruyante : kalz a drouz vez barz an  
uzin-ze.

bruyère 1) brug m.  
la bruyère est en fleur : 'ma ar brug en o bleuf.  
2) /divers/  
un coq de bruyère : eur hog gouez.

bûche 1) skillenn f. skillou ; treujenn f. treujou  
fendre des bûches : ober skillou.  
un tas de bûches : eur bern skillou.  
2) /grosse bûche/ kev m. -iou ; eteo m. etivi  
la bûche de Noël : kev an Nedeleg ; eteo an Nedeleg.  
3) /divers/  
prendre une bûche : kaoud eul lamm.

bûcher 1) /tas de bois à brûler/ bern keuneud ; bern skillou  
2) /divers/  
la sorcière a été mise au bûcher : deveed eo bed ar  
zorserez war an tan.

bûcheron diskarer-gwez m. diskarerien-gwez ; koadar m. -ien  
il est bûcheron au Canada : hennez zo diskarer-gwez  
barz ar Hanada.

buée 1) /vapeur/ êzenn f.  
ouvre la fenêtre pour chasser la buée : digor ar prenestr  
da gas an êzenn er mêz.  
2) /condensation/ dour m.  
il y a de la buée sur les vitres : dour zo war ar gwer.

buffet kanastell f. -ou ; bufed m. bufejou  
mets les assiettes dans le buffet : lak an asiedou barz ar  
ganastell.

buis beuz m.  
une touffe de buis : eur vodenn veuz.  
du buis béni : beuz benniged.  
une cuiller de buis : eul loa veuz.  
un bâton de buis : eur vaz veuz.

buisson bodenn f. -ou  
un buisson de houx : eur vodenn gelenn.  
un buisson d'épine : eur vodenn spenn.  
un buisson de ronces : eur vodenn drez.

buissonnière faire l'école buissonnière : ober skol al louarn ; ober  
skolig al louarn.

bulbe / à fleur/ ognonenn f. ognon.

bulle 1) /d'air/ klogorenn f. klogor  
des bulles s'élèvent à la surface de l'eau : sevel a ra  
klogor war horre an dour.  
2) lagadenn f. -ou  
quand il pleut, on voit des bulles à la surface de l'étang :  
pa ra glao e vez gweled lagadennou war horre al lenn.  
3) la bulle du pape : lizer ar pab.

bulletin le bulletin paroissial : kannadig ar barrez.

bureau 1) bureo m. bureviou ; burevier  
il travaille à son bureau : 'ma o labourad ouz e vureo.  
il est employé de bureau : labourad a ra barz eur bureo.  
2) buro m. -iou  
un bureau de tabac : eur buro butun.  
3) /divers/  
le bureau de poste : ar post.

burette 1) bured f. burejou  
2) /contenu/ buredad f. -ou  
3) burette à huile : eoulier m. ; ioulier m.

bus otobus cf. autocar.

but 1) gwenn m. /cible/  
il a tiré droit au but : skoed e-neus barz ar gwenn.  
2) /foot-ball/ but m. butchou  
3) /divers/  
de but en blanc : a greiz toud.  
quel est son but ? : petra 'ma o klask ?  
il a atteint son but : deud eo a benn deuz e dël.  
dans le but de : 'vid.  
dans quel but demandez-vous cela ? : da betra 'maoh o  
houll ze ?  
il a manqué son but : c'hwited e-neus war e dël.

buté cf. têtü  
cet enfant est buté : eur penn kaled e-neus ar bugel-ze.

buter teuka (teuk-) e droad  
j'ai buté sur un caillou : teuked am-eus ma zroad ouz eur  
mên.

butin preiz m.

butte tuchenn f. -ou ; krehenn f. -ou ; torgenn f. -ou  
il y a une maison sur la butte : eun ti zo war an duchenn.  
descendre de la butte : diskenn diwar an duchenn.  
grimper en haut de la butte : pignad beteg penn an duchenn.

butter douari (douar-)  
il n'a pas encore buté ses pommes de terre : n'e-neus ked  
douared e batatez hoaz.

buttoir douarer m.  
le manche du buttoir : troad an douarer.

buvable 1) evab  
ce vin n'est pas buvable : n'eo ked evab ar gwin-ze.  
2) un médicament buvable : eul louzou da veza eved.

buveur 1) ever m. -ien  
c'est un buveur d'eau : hennez zo eun ever dour.  
2) lonker m. -ien  
c'est un grand buveur : hennez zo lonker.

Faint, illegible text, possibly bleed-through from the reverse side of the page.

ça	<p>1) an dra-mañ /à portée de la main/ ; ze ; an dra-ze /hors de portée/  qu'est-ce que c'est que ça : petra eo ze ?  je veux ça : an dra-ze am-eus c'hoant da gaoud.  ça ne fait rien : ze ne ra tra ; ze n'eo mann.  comme ça : vel-se ; kemend-all.  c'est comme ça ! : vel-se ma an traou !  ça brûle ! : devi a ra !  ça pique ! : pikad a ra !  ça gratte ! : skrapad a ra !  c'est toujours ça de gagné : kement-se gonezed eo.  qu'est-ce que ça peut faire : petra vid se ?  ça ne vous regarde pas : ze ne zell ked ahanoh.</p> <p>2) neuze  alors comme ça vous nous quittez ? : setu neuze 'maoh o vond da guitaad ahanom ?</p> <p>3) /divers/  il n'y en a pas tant que ça : n'eus ked kement-se.  ça, par exemple ! : biskoaz kemend-all !  ça m'est égal ! : ne ran ked forz !  comment ça va ? : penñz 'ma ar bed ?  ça va : mond a ra mad.  ça ne va pas : n'a ked mad an traou.  où ça ? : peleh ta ?  comment ça ? : penñz ta ?  ça non ! : nann vad !  ça, alors ! : hola, vad !  ça ne vaut pas la peine : ne dalv ked ar boan.  çà et là : amañ hag ahont.</p>
caban	<p>kaban m. -ou  le marin a mis son caban : gwisked e-neus ar martolod e gaban.</p>
cabane	<p>loch f. -ou ; kabanell f. -ou  une cabane à lapins : eul loch lapined.  une cabane en planches : eul loch koad.</p>
cabaret	<p>tavarn f. -iou ; cf. café.</p>
cabine	<p>kabinenn f. -ou  la cabine du capitaine : kabinenn ar habiten.</p>
cabinet	<p>1) kabined f. kabinejou ; priveziou /livr./ pl.  2) /divers/  aller au cabinet : mond war vêz.</p>
câble	<p>kabl m. -ou ; fard m. -ou ; tortis m. -ou /en paille/  tendre un câble d'acier entre deux mâts : astenn eur fard dir tre diou wern.</p>

cabosser koaga (koag-)  
la casserole est cabossée : koaged eo ar gastolodenn.

cabrer (se) le cheval s'est cabré : saved eo ar marh war e zaou droad drefiv.

cache-cache jouer à cache-cache : c'hoari kou-kou ; c'hoari mond da guzad.

caché kuzed  
il est bien caché : kuzed mad eo.  
il est mal caché : n'eo ked kuzed mad.

cache 1) kuzad (kuz-) ; koach (koach-)  
cacher un objet : kuzad eun dra-bennag.  
cacher son argent : kuzad e arhant.  
cacher des armes : kuzad armou.  
il lui a caché la vérité : kuzed e-neus ar wirionez dioutañ.  
2) /divers/  
les arbres cachent la maison : ne vez ked gweled an ti gand ar gwez.  
les nuages cachent le soleil : ne vez ked gweled an heol gand ar houmoul.  
elle cache son âge : ne fell ked dezi lared ped vloaz he-deus.  
il ne cache pas ses opinions : ne vez ked jened vid lared petra zofj.

cache (se) 1) mond (irr.) da guzad  
se cacher derrière la porte : mond da guzad drefiv an nor.  
se cacher derrière un talus : mond da guzad drefiv eur hleuz.  
se cacher sous le lit : mond da guzad dindan ar gwele.  
se cacher sous la table : mond da guzad dindan an dël.  
se cacher dans un bois : mond da guzad barz eur hoad.  
se cacher dans un arbre : mond da guzad barz eur wezenn.  
il est allé se cacher bien vite : êd eo buan da guzad.  
va te cacher : kerz da guzad.  
2) se cacher de quelqu'un : kuzad diouz unan-bennag.

cachet 1) /pharmacie/ kached m. -ou  
prendre un cachet : kemer eur hached.  
acheter une boîte de cachets : prena eur voestad kachedou.  
tu n'as pas un cachet ? : n'eus kached bed ganit ?  
2) /sceau/ siell m. -ou

cacheter si'ella (si'ell-)  
une lettre bien cachetée : eul lizer sielled mad.

cache 1) toull kuz m. toullou kuz  
son argent est dans une cache : ema e arhant barz eun toull kuz.  
2) kuziadenn f. -ou /contenu/  
l'écureuil a une cache pleine de noisettes : ar haz koad e-neus eur guziadenn graoñ kelvez.  
3) en cache : dre guz  
il boit en cache : eva a ra dre guz.  
ils s'écrivent en cache : dre guz e skrivont an eil d'egile.

cadastre kadastr m.  
le cadastre de la commune : kadastr ar gomun.  
l'ancien cadastre : ar hadastr koz.  
le nouveau cadastre : ar hadastr nevez.  
les employés du cadastre : pôtred ar hadastr.

cadavre 1) /personne/ korv maro m. korvou maro  
les cadavres sont restés sur le champ de bataille : maned eo ar horvou maro war dachenn an emgann.  
2) /animal/ loen maro f. loened maro  
les corbeaux se nourrissent de cadavres : ar brini a zebr kig al loened maro.

cadeau elle m'a fait un cadeau : bed am-eus eun dra bennag ganti.  
je lui ai fait cadeau d'un livre : roed am-eus eul leor dezaff (dezi).  
qui t'en a fait cadeau ? gand piou teus bed an dra-ze ?

cadenas krabotinenn f. -ou ; kadrans m. -ou  
fermer au cadenas : prena gand eur grabotinenn.  
la clef du cadenas : alhwez ar grabotinenn.

cadet 1) /le plus jeune/  
le cadet de mes fils : ma mab yaouanka.  
ma fille cadette : ma merh yaouanka.  
2) /le puiné/ an eil kosa.

cadran 1) /pour une horloge/ dremm m. -ou ; kadrans m. -ou  
le cadran de l'horloge : dremm an orolaj.  
2) kadrans m. -ou  
le cadran de ma montre : kadrans ma montr.  
un cadran solaire : eur hadrans-heol.

cadre 1) stern m. -iou  
le cadre d'une photographie : stern eur portred.  
le cadre d'un tableau : stern eur dëlenn.  
2) mestr m. mistri  
les cadres de l'usine : mistri an uzin.  
3) kadrenn f. -ou /bicyclette/

**cafard** laouenn dar f. laou tar.

**café**

1) /boisson/ kafe m. -ou  
 du café noir : kafe du.  
 du café fort : kafe kreñv.  
 du café chaud : kafe tomm.  
 du café brûlant : kafe bero.  
 du café tiède : kafe klouar  
 du bon (mauvais) café : kafe mad (fall).  
 du café amer : kafe c'hwero.  
 du café réchauffé : kafe adtommed.  
 je vais faire du café : me zo o vond d'ober eur banne kafe.  
 passer le café : tremen ar hafe.  
 boire du café : eva kafe.  
 boire un café : eva eur banne kafe.  
 servir le café : servija ar hafe.  
 servez-moi un café, s'il vous plaît : lakit eur banne kafe  
 din, mar plij.  
 aimer le café : kavoud mad ar hafe.  
 réchauffer le café : tomma ar hafe.  
 je ne bois jamais de café : n'evan jamez a gafe.  
 je l'ai invité à boire le café : lared am-eus dezañt dond da  
 eva eur banne kafe.  
 sucrer son café : lakad sukr en e gafe.  
 moultre du café : mala kafe.  
 du café au lait : kafe-lêz ; kafe dre lêz.  
 du café-moulu : kafe maled.  
 acheter un paquet de café : prena eur pakad kafe.  
 un moulin à café : eur vilin-gafe.  
 une tasse de café : eun tasad kafe.  
 un bol de café : eur volennad kafe.  
 du café à la chicorée : kafe-chikore.  
 du café en poudre : kafe poultr.  
 un grain de café : eur gafeenn.  
 il y a des grains de café sous la table : kafeennou zo  
 dindan an dâl.  
 le café m'a empêché de dormir : n'am-eus ked galled  
 kousked gand ar hafe am-oa eved.  
 2) /lieu public/ ostaleri f. -ou ; tavarn f. -iou (dés.)  
 un grand café : eun ostaleri vraz.  
 un petit café : eun ostaleri vihan.  
 un vieux café : eun ostaleri goz.  
 aller au café : mond d'an ostaleri.  
 il tient un café sur la place : 'ma o terhel eun ostaleri  
 war blasenn ar bourk.  
 ici, les cafés ferment à deux heures du matin : amañ e  
 serr an ostaleriou da ziou eur diouz ar mintin.  
 la serveuse du café : matez (plah) an ostaleri.  
 3) /divers/  
 le café Mével : ti Mevel.  
 elle va souvent boire du café chez ses voisins : aliez  
 eh a da gafea (gafeta).  
 le patron du café : an ostiz.

**cache**

1) toull kuz m. toullou kuz  
 son argent est dans une cache : ema e arhant barz eun  
 toull kuz.  
 2) kuziadenn f. -ou /contenu/  
 l'écureuil a une cache pleine de noisettes : ar haz  
 koad e-neus eur guziadenn graof kelvez.  
 3) en cache : dre guz  
 il boit en cache : eva a ra dre guz.  
 ils s'écrivent en cache : dre guz e skrivont an eil  
 d'egile.

**cadastre** kadastr m.  
 le cadastre de la commune : kadastr ar gomun.  
 l'ancien cadastre : ar hadastr koz.  
 le nouveau cadastre : ar hadastr nevez.  
 les employés du cadastre : pôtréd ar hadastr.

**cadavre**

1) /personne/ korv maro m. korvou maro  
 les cadavres sont restés sur le champ de bataille : maned  
 eo ar horvou maro war dachenn an emgann.  
 2) /animal/ loen maro f. loened maro  
 les corbeaux se nourrissent de cadavres : ar brini a zebr  
 kig al loened maro.

**cadeau** elle m'a fait un cadeau : bed am-eus eun dra bennag ganti.  
 je lui ai fait cadeau d'un livre : roed am-eus eul leor  
 dezañt (dezi).  
 qui t'en a fait cadeau ? gand piou teus bed an dra-ze ?

**cadenas** krabotinenn f. -ou ; kadrans m. -ou  
 fermer au cadenas : prena gand eur grabotinenn.  
 la clef du cadenas : alhwéz ar grabotinenn.

**cadet** 1) /le plus jeune/  
 le cadet de mes fils : ma mab yaouanka.  
 ma fille cadette : ma merh yaouanka.  
 2) /le puiné/ an eil kosa.

**cadran** 1) /pour une horloge/ dremm m. -ou ; kadrans m. -ou  
 le cadran de l'horloge : dremm an orolaj.  
 2) kadrans m. -ou  
 le cadran de ma montre : kadrans ma montr.  
 un cadran solaire : eur hadrans-heol.

**cadre** 1) stern m. -iou  
 le cadre d'une photographie : stern eur portred.  
 le cadre d'un tableau : stern eur dâlen.  
 2) mestr m. mistri  
 les cadres de l'usine : mistri an uzin.  
 3) kadrans f. -ou /bicyclette/

cafard

laouenn dar f. laou tar.

café

1) /boisson/ kafe m. -ou  
du café noir : kafe du.  
du café fort : kafe kreftv.  
du café chaud : kafe tomm.  
du café brûlant : kafe bero.  
du café tiède : kafe klouar  
du bon (mauvais) café : kafe mad (fall).  
du café amer : kafe c'hwero.  
du café réchauffé : kafe adtommed.  
je vais faire du café : me zo o vond d'ober eur banne kafe.  
passer le café : tremen ar hafe.  
boire du café : eva kafe.  
boire un café : eva eur banne kafe.  
servir le café : servija ar hafe.  
servez-moi un café, s'il vous plaît : lakit eur banne kafe  
din, mar plij.  
aimer le café : kavoud mad ar hafe.  
réchauffer le café : tomma ar hafe.  
je ne bois jamais de café : n'evan jamez a gafe.  
je l'ai invité à boire le café : lared am-eus dezaf dond da  
eva eur banne kafe.  
sucre son café : lakad sukr en e gafe.  
moudre du café : mala kafe.  
du café au lait : kafe-lêz ; kafe dre lêz.  
du café-moulu : kafe maled.  
acheter un paquet de café : prena eur pakad kafe.  
un moulin à café : eur vilin-gafe.  
une tasse de café : eun tasad kafe.  
un bol de café : eur volennad kafe.  
du café à la chicorée : kafe-chikore.  
du café en poudre : kafe poultr.  
un grain de café : eur gafeenn.  
il y a des grains de café sous la table : kafeennou zo  
dindan an dâl.  
le café m'a empêché de dormir : n'am-eus ked galled  
kousked gand ar hafe am-oa eved.  
2) /lieu public/ ostaleri f. -ou ; tavarn f. -iou (dés.)  
un grand café : eun ostaleri vraz.  
un petit café : eun ostaleri vihan.  
un vieux café : eun ostaleri goz.  
aller au café : mond d'an ostaleri.  
il tient un café sur la place : 'ma o terhel eun ostaleri  
war blasenn ar bourk.  
ici, les cafés ferment à deux heures du matin : amaf e  
serr an ostaleriou da ziou eur diouz ar mintin.  
la serveuse du café : matez (plah) an ostaleri.  
3) /divers/  
le café Mével : ti Mevel.  
elle va souvent boire du café chez ses voisins : aliez  
eh a da gafea (gafeta).  
le patron du café : an ostiz.

cachette

1) toull kuz m. toullou kuz  
son argent est dans une cachette : ema e arhant barz eun  
toull kuz.  
2) kuziadenn f. -ou /contenu/  
l'écureuil a une cachette pleine de noisettes : ar haz  
koad e-neus eur guziadenn graof kelvez.  
3) en cachette : dre guz  
il boit en cachette : eva a ra dre guz.  
ils s'écrivent en cachette : dre guz e skrivont an eil  
d'egile.

cadastre

kadastr m.  
le cadastre de la commune : kadastr ar gomun.  
l'ancien cadastre : ar hadastr koz.  
le nouveau cadastre : ar hadastr nevez.  
les employés du cadastre : pôtréd ar hadastr.

cadavre

1) /personne/ korv maro m. korvou maro  
les cadavres sont restés sur le champ de bataille : maned  
eo ar horvou maro war dachenn an emgann.  
2) /animal/ loen maro f. loened maro  
les corbeaux se nourrissent de cadavres : ar brini a zebr  
kig al loened maro.

cadeau

elle m'a fait un cadeau : bed am-eus eun dra bennag ganti.  
je lui ai fait cadeau d'un livre : roed am-eus eul leor  
dezaf (dezi).  
qui t'en a fait cadeau ? gand piou teus bed an dra-ze ?

cadenas

krabotinenn f. -ou ; kadrans m. -ou  
fermer au cadenas : prena gand eur grabotinenn.  
la clef du cadenas : alhwez ar grabotinenn.

cadet

1) /le plus jeune/  
le cadet de mes fils : ma mab yaouanka.  
ma fille cadette : ma merh yaouanka.  
2) /le puiné/ an eil kosa.

cadran

1) /pour une horloge/ dremm m. -ou ; kadrans m. -ou  
le cadran de l'horloge : dremm an orolaj.  
2) kadrans m. -ou  
le cadran de ma montre : kadrans ma montr.  
un cadran solaire : eur hadrans-heol.

cadre

1) stern m. -iou  
le cadre d'une photographie : stern eur portred.  
le cadre d'un tableau : stern eur dâlen.  
2) mestri m. mistri  
les cadres de l'usine : mistri an uzin.  
3) kadrans f. -ou /bicyclette/

cafard

laouenn dar f. laou tar.

café

1) /boisson/ kafe m. -ou  
du café noir : kafe du.  
du café fort : kafe kreftv.  
du café chaud : kafe tomm.  
du café brûlant : kafe bero.  
du café tiède : kafe klour  
du bon (mauvais) café : kafe mad (fall).  
du café amer : kafe c'hwero.  
du café réchauffé : kafe adtommed.  
je vais faire du café : me zo o vond d'ober eur banne kafe.  
passer le café : tremen ar hafe.  
boire du café : eva kafe.  
boire un café : eva eur banne kafe.  
servir le café : serviya ar hafe.  
servez-moi un café, s'il vous plaît : lakit eur banne kafe din, mar plij.  
aimer le café : kavoud mad ar hafe.  
réchauffer le café : tomma ar hafe.  
je ne bois jamais de café : n'evan jamez a gafe.  
je l'ai invité à boire le café : lared am-eus dezafñ dond da eva eur banne kafe.  
sucrer son café : lakad sukr en e gafe.  
moudre du café : mala kafe.  
du café au lait : kafe-lêz ; kafe dre lêz.  
du café-moulu : kafe maled.  
acheter un paquet de café : prena eur pakad kafe.  
un moulin à café : eur vilin-gafe.  
une tasse de café : eun tassad kafe.  
un bol de café : eur volennad kafe.  
du café à la chicorée : kafe-chikore.  
du café en poudre : kafe poultr.  
un grain de café : eur gafeenn.  
il y a des grains de café sous la table : kafeennou zo dindan an ddi.  
le café m'a empêché de dormir : n'am-eus ked galled kousked gand ar hafe am-oa eved.  
2) /lieu public/ ostaleri f. -ou ; tavarn f. -iou (dés.)  
un grand café : eun ostaleri vraz.  
un petit café : eun ostaleri vihan.  
un vieux café : eun ostaleri goz.  
aller au café : mond d'an ostaleri.  
il tient un café sur la place : 'ma o terhel eun ostaleri war blasenn ar bourk.  
ici, les cafés ferment à deux heures du matin : amañ e serr an ostaleriou da ziou eur diouz ar mintin.  
la serveuse du café : matez (plah) an ostaleri.  
3) /divers/  
le café Mével : ti Mevel.  
elle va souvent boire du café chez ses voisines : aliez eh a da gafea (gafeta).  
le patron du café : an ostiz.

cafetière

pod-kafe m. podou-kafe ; pod ar hafe m. podou ar hafe ; greg m. -ou ; kafetierenn f. -ou  
le couvercle de la cafetière : golo ar pod-kafe.  
le bec de la cafetière : flutenn ar pod-kafe.  
le fond de la cafetière : fofis ar pod-kafe.  
la poignée de la cafetière : dorn ar pod-kafe.  
le filtre de la cafetière : sil ar pod-kafe.

cafe

kaoued f. kaouedou  
les barreaux de la cage : barennou ar gaoued.  
la porte de la cage : dor ar gaoued.  
une cage en bois (en fer) : eur gaoued koad (houarn).  
mettre en cage : lakad barz eur gaoued.  
l'oiseau s'est échappé de la cage : tehed eo al labous er-mêz dez ar gaoued.

cafeot

1) kased m. -ou ; kajo m. -iou  
remplir un cageot : karga eur hased.  
vendre des fruits en cageots : gwerza frouez en kasedou.  
2) kasedad m. -ou ; kajotad m. -ou  
un cageot d'oignons : eur hajotad ognon.

cagneux

il a les genoux cagneux : chouk-daoulin eo.

cahier

1) kaier m. -ou  
un cahier neuf : eur haier nevez.  
un vieux cahier : eur haier koz.  
un gros cahier : eur haier teo.  
un cahier mince : eur haier moan.  
un beau cahier : eur haier brao.  
un cahier sale : eur haier louz.  
un cahier déchiré : eur haier roged<sup>d</sup> (freged).  
un cahier taché : eur haier sôted ; tarched.  
un cahier rouge (bleu) : eur haier ru (glaz).  
acheter un cahier : prena eur haier.  
ouvrir (fermer) son cahier : digori (serri) e gaier.  
écrire sur son cahier : skriva war e gaier.  
apporter son cahier à l'école : kas (digas) e gaier d'ar skol.  
j'ai oublié mon cahier chez moi : ankoueed am-eus ma haier er gêr.  
j'ai oublié mon cahier dans la classe : chomed eo ma haier barz ar hias.  
j'ai arraché une page à mon cahier : tenned am-eus eur bajenn dez barz ma haier.  
écrire son nom sur son cahier : lakad e ano war e gaier.  
un cahier d'écolier : eur haier skol.  
j'ai fini mon cahier : fin 'meus ma haier.  
j'ai perdu mon cahier : kollad am-eus ma haier.  
2) kaierad m. -ou  
un cahier de chansons : eur haierad kanaouennou.

cahot stroffs m.  
j'ai été obligé de m'asseoir à cause des cahots : red eo bed din azeza gand ar stroffs a oa.

cahoteux stroffsuz  
le chemin est cahoteux : stroffsuz eo an hent.

cahute siklut m. siklutchou ; koz ti m. koz tiez.  
il vit dans une petite cahute : barz eun tamm siklut 'ma chom.

caille koaill f. -ed

cailler 1) kaouledi (kaouled-) /lait/  
faire cailler du lait : lakad lêz da gaouledi.  
2) kaledi (kaled-) /sang/  
du sang caillé : gwad kaleded.

caillé kaouled  
du lait caillé : lêz kaouled.

caillot kaouledenn f. -ou ; kaillenn f. -ou  
un caillot de sang : eur gaouledenn wad.

caillou mên m. mein ; min m. mein  
un petit caillou : eur mên bihan.  
un gros caillou : eur mên braz.  
un caillou plat : eur mên plad.  
mais : un caillou rond : eur vilienn (cf. galet).  
un caillou pointu : eur mên lemm.  
ramasser un caillou : dastum eur mên.  
jeter des cailloux : sklupal (darhaou) mein.  
se battre à coups de cailloux : nem ganna a dōliou mein.  
casser des cailloux : torri mein.  
un tas de cailloux : eur bern mein.  
les cailloux : ar mein ; ar vein.

caillouteux meineg  
un chemin caillouteux : eun hent meineg.  
de la terre caillouteuse : douar meineg.

caisse 1) kased m. -ou  
une grande caisse : eur hased braz.  
une petite caisse : eur hased bihan.  
une caisse lourde (légère) : eur hased ponner (skafv).  
une caisse pleine (vide) : eur hased leun (goullo).  
une caisse longue (carrée) : eur hased hir (kare).  
ouvrir (fermer) une caisse : digori (serri) eur hased.  
remplir (vider) une caisse : karga (diskarga) eur hased.  
déballer une caisse d'oranges : tenna an orañjez er-mêz deuz eur hased.

le couvercle de la caisse : golo ar hased.  
le fond de la caisse : fofis ar hased.  
les côtés de la caisse : kosteziou ar hased.  
une caisse en bois : eur hased koad.  
une caisse en carton : eur hased kartofis.

2) kasedad m. -ou  
une caisse d'assiettes : eur hasedad asiedou.  
une caisse de livres : eur hasedad leoriou.  
une caisse de fruits : eur hasedad frouez.  
une caisse de légumes : eur hasedad legumach.

3) /commerce/ kes m. -ou ; kef m. -iou ; krouf an arhant (dés.)  
elle est assise à la caisse : azezed eo ouz ar hes.  
il n'y a plus d'argent dans la caisse : n'eus gwenneg bed ken barz ar hes.  
La Caisse d'Épargne : ar hef espern.

4) cf. tambour.

cajoler 1) ober (irr.) cherig ; cf. caliner  
elle cajole son mari : ober ra cherig d'he gwaz.  
2) lubani (luban-)

cal kaledenn f. -ou  
il a des cals plein les mains : beza zo kaledennou war e zaouarn.

calcul 1) kont m. kofichou cf. compte.  
2) il est fort en calcul : eur maill eo da gonta.

calculer kanta (kont-) cf. compter  
une machine à calculer : eur mikanik da gonta.

cale 1) /marine/ kal m. -iou  
la cale (du bateau) est pleine de poissons : ar hal zo leun a besked.  
il est tombé dans la cale : kouezed eo barz ar hal.  
la cale (du port) est glissante : riki (ramp) eo ar hal.  
2) blod m. blojou ; skour m. -iou  
j'ai mis une cale sous le pied de la table : laked am-eus eur blod dindan troad an dōl.  
mettre une cale derrière la roue : lak eur skour drefiv ar rod.

caleçon kalson m. -iou  
un caleçon long (court) : eur halson hir (berr).  
mettre son caleçon : gwiska e galson.

calendrier almanag m. almanagou  
le calendrier des postes : almanag ar post.  
accrocher le calendrier au mur : lakad an almanag ouz ar voger.  
consulter le calendrier : selled war an almanag.

caler 1) /meubles/ bloda (blod-)  
caler une chaise : bloda eur gador.  
2) /véhicule/ skoura (skour-)  
caler une voiture : skoura eur wetur.

calfater kalafeti (kalafet-)

calice /rel./ kalir m. -iou ; kalei m. -ou.

califourchon (à) a-hêliad ; a-gavalièr  
il est assis à califourchon sur une branche : azezed eo a-hêliad war eur brank.

câlin 1) moumoun  
2) il fait son câlin : ober a ra e vitaouig.

câliner moumouna (moumoun-) ; cherisa (cheris-)  
sa mère le caline : moumouned eo gand e vamm.

calleux il a les mains calleuses : kaledennou zo war e zaouarn.

calme 1) /nom/ kalmijenn f. /météo/  
2) sioulder /impression/  
le calme de la nuit : sioulder an noz.

calme 1) /adj./ sioul ; kalm  
c'est un homme calme : eun den sioul eo.  
la mer est calme : sioul eo ar mor.  
le temps est calme : sioul eo an amzer.  
2) cf. silencieux, tranquille.

calmer (se) 1) dond (irr.) da veza sioul ; sioulaad (sioula-)  
la mer s'est calmée : deued eo ar mor da veza sioul.  
2) /divers/  
la pluie et le vent se sont calmés : taved eo ar glao hag an avel.  
ma douleur s'est calmée : torred eo d'am 'foan.

calomnier tamall (tamall-) e gaou ; dikria (dikri-)  
il m'a calomnié : dikried e-neus ahanon.

calvaire 1) kalvar m. -iou  
un vieux calvaire : eur halvar koz.  
les calvaires bretons : kalvartou Breiz.  
le calvaire de Pleyben : kalvar Pleiben.  
2) sa vie a été un calvaire : douged e-neus e groaz pad e vuhez.

camarade kamarad m. -ed ; kamaradez f. -ed ; cf. ami  
un bon camarade : eur hamarad mad.  
un camarade d'école : eur hamarad skol.  
un camarade de régiment : eur hamarad servij.

camaraderie cf. amitié.

camard cf. camus.

campouis lard koz m. (dés.)  
une tache de campouis : eun tarch lard koz.

cambré krom  
elle a le pied cambré : eun troad krom he-deus.

cambrïoler laerez (laer-) ; cf. voler.

cambrïoleur laer m. -on ; cf. voleur.

camion 1) kamion m. -ou  
un gros camion : eur hamion braz.  
un vieux camion : eur hamion koz.  
un camion vert et jaune : eur hamion glaz ha melen.  
conduire un camion : kondui eur hamion.  
charger (décharger) un camion : karga (diskarga) eur hamion.  
il est tombé en panne avec son camion : chomed eo sahed gand e gamion.  
il va à Paris toutes les semaines avec son camion : beb sun eh a da Baris gand e gamion.  
il s'est fait écraser par un camion : friked eo bed gand eur hamion.  
il roule trop vite avec son camion : re vuan eh a gand e gamion.  
2) kamionad m. -ou  
un camion de sable : eur hamionad trêz.  
un camion de terre : eur hamionad douar.  
un camion de gravier : eur hamionad grouan.  
un camion de légumes : eur hamionad legumach.  
je me suis fait livrer un camion de paille : laked am-eus digas eur hamionad plouz.

camionnette kamionetenn f. -ou cf. camion.

camionneur kamioner m. -ien

camp kaft m. -iou ; kamp m. -ou (livr.)  
un camp américain : eur haft amerikan.  
un camp de prisonniers : eur haft prisonnierien.

campagnard 1) pôtr diwar ar mêz m. pôtred diwar ar mêz  
2) /hommes et femmes/ tud diwar ar mêz  
le jour du marché, il y a beaucoup de campagnards au  
bourg : da zevez ar marhad e vez kalz a dud diwar ar  
mêz barz ar vourh.

campagnarde plah (maouez) f. -ed diwar ar mêz.

campagne 1) mêz m. -iou  
je préférerais vivre à la campagne : me garfe gwelloc  
beva war ar mêz.  
les gens de la campagne : an dud diwar ar mêz.  
les travaux de la campagne : al labour a vez d'ober war  
ar mêz.  
il a une maison à la campagne : eun ti e-neus war ar mêz.  
c'est un curé de campagne : person eo barz eur barrez  
war ar mêz.  
aller se promener à la campagne : mond d'ober eun dro  
war ar nêz.  
la campagne est verte : glaz eo ar mêziou.  
ils se sont perdus en pleine campagne : nem golled int  
kreiz ar mêziou.  
les jeunes quittent la campagne pour aller travailler en  
ville : ar ré yaouank diwar ar mêz ah a kuit da labourad  
e kêr.  
2) /pêche/ mareaj f. -ou  
la campagne de thon a été catastrophique : fall spontuz  
eo bed ar vareaj toft er bloaz-mañ.  
3) /électorale/ kampagn m. -ou  
on fait beaucoup de promesses pendant la campagne élec-  
torale : kalz traou a vez prometted pad ar hampagn rôg  
ar votadeg.  
4) /divers/  
le maire fait sa campagne électorale : o kabali 'ma ar  
mêr.

camper kampi (kamp-)  
il va camper tous les étés : beb bloaz pad an haftv eh a  
da gampi.

camping 1) un terrain de camping : eun dachenn da gampi ; eur  
hamping.  
2) faire du camping : mond (irr.) da gampi.

camus togn  
il a le nez camus : eur fri togn e-neus.

Canadien Kanadian m. -ed /prononcer kan- comme en français/  
il est Canadien : Kanadian eo.  
mais : les forêts canadiennes : koajeier ar Hanada.

Canadienne /femme/ Kanadianez f. -ed

canaille aillon m. -ed ; kanaillez (col.)

canal kanol f. -iou  
traverser le canal : treuzi ar ganol.  
le canal de Nantes à Brest : kanol ar Hastellin.

canalisation cf. tuyau.

canard 1) houad m. houidi ; kanig m. -ed  
un canard sauvage : eun houad gouez.  
le bec du canard : beg an houad.  
la queue du canard : lost an houad.  
les pattes du canard : treid an houad.  
les plumes du canard : plu an houad.  
mais : la mare aux canards : ar poull.  
il marche comme un canard : kerzed a ra vel eun houad.  
le canard vole : nijal a ra an houad.  
plumer un canard : diblua eun houad.  
vider un canard : divouzella (divouella) eun houad.  
le canard barbotte : bourbouillad a ra an houad.  
élever des canards : sevel houidi.  
donner à manger aux canards : boueta an houidi.  
il nage comme un canard : neuiat a ra vel eur hanig.  
2) /viande/ kig houad m.  
je n'aime pas le canard : ne blij ked ar hig houad din.  
le canard est plus ferme que le poulet : kaletoh eo ar hig  
houad vid ar hig yar.  
3) /mâle/ maillard m. -ed

cancer kaftser m. ; krign beo m.

candidat il est candidat au brevet : 'ma o vond da glask e vreued.  
combien y a-t-il de candidats aux élections municipales ?  
ped zo war ar reftk da vond da guzulier en ti kêr ?

cane houadez f. -ed ; kanig f. -ed  
un œuf de cane : eur vi houadez ; eun u houadez.

caneton houad bihan m. houidi bihan  
les canetons suivent leur mère : mond a ra an houidi  
bihan da heul o mamm.

2) labous m. -ed ; evn m. -ed cf. poussin  
la cane et ses canetons : ar ganig hag he laboused.

canif cf. couteau.

canne 1) baz f. bizier cf. bâton  
une canne à pêche : eur vaz da besketa.  
2) /plante/ korzenn f. korz cf. roseau  
de la canne à sucre : korz sukr.

cannelle /épice/ kanell f.  
du vin chaud à la cannelle : eur banne gwin tomm gand kanell barz.

canon kanon m. -iou ; kanol m. -iou  
un gros canon : eur hanon braz.  
charger un canon : karga eur hanon.  
tirer un coup de canon : tenna eun tñl (eun tenn) kanon.  
